

AR PESK

(Rimadell fentres)

①

.62

ME ZO EUR PESK ,  
EUR PAOUR KEZ PESK ,  
TAPET , SI'WAZ !  
EUN DEVEZ  
DRE ZEQUEZ  
DU-MONT , PELL EUZ AR RAZ  
EN DONDER AR MOR ~~GLAZ~~ BRAS ,  
EUR PESK  
ASTENNET  
EN VA C'HORN  
MESK AR SKORN  
EVEL EUN ASKORN  
NOAZ .  
EUR PESK MARO  
HA PEURVARO ,  
REUT EVEL EUR VAZ .  
EUR PESK DALL  
EVEL AR PESKED ALL  
TAPET DU-MONT , PELL EUZ AR RAZ  
EN DONDER AR MOR BRAZ

ME ZO EUR PESK  
QWERZET HI'RIE  
DIDUZ AR C'HRESK  
WAR EUR C'HAE  
DOST DA VREST...  
EUR PESK PREST  
DA VEZA DISKANTET  
DI'LOSTET HA DI'BENNET  
DIBOUZELENNET  
DI'FLUGEZENNET,  
QWALHET HA RI'BOULET,

TORCHET HA SEHET,  
SALET HA PEBRET,  
HA PERISILHET...

EUR PESK  
FRESK

PRETT DA VEZA ROUZET  
WAR EUN TU

HA WAR AN TU ALL,  
'BARZ AN AMANN SALL,  
EN EUR BILIQ DU  
'US D'EUN TAN RU,  
PELL D'IOUZ AR RAZ  
HA D'IOUZ AR MOR BRAZ..

HA WARC'HONZ

ME VO EUR PESK POAZ  
WAR DAOL PAOTR E GOV BRAZ  
SKUIZ E FLUGEZENN  
— O PAOUR KEZ DEN! —  
DRE FORZ DEBRI  
— O PESORT SI! —

GRILLED VOR HA LEGISTRI'

HA GOUDE MERENN  
ME NA V'N KEN  
NE MED EUN DRAEN  
EUN DRAEN PESK

BRESK

A-BOAN MAD

DA DAOL D'AR C'HAZ

PAOUR KEZ PESK AR MOR BRAZ !!

PAOTR JEP